

EN ENOR DA ZANT WELTAS.



Var don quelven , pe var hini Zantes Anna.

Christenien an Armoric
 Ha c'houi oll Vretonet,
 Oll da gana ur c'hantic
 Ho moeziou unisset ;
 Gant ar joa en hon c'halon
 Canomp ur zant quen bras ,
 Canomp gant devotion
 An autrou zant Weltas.

En touez an oll stæret
 Demeus ar firmamant
 Biscoas na zo bet guelet
 Stereden quen brillant
 Evel m'en deus bet brilllet
 Zant Weltas en Ilis
 Ur vech m'eo bet digacet
 En ho touez , Breizis.

D'ober tri zra en hon bro
 Gant Doue voa choazet ,
 D'ober vit hon pec'hedjou
 Ur binijen gallet ,
 Da vouga var hon zouar
 An tan deus ar brezel ,
 Da zevni da vont d'ar gloar
 Christenien Breiz-Izel.

D'en renti capabl a ze
Doue en preparas ,
Ha hed-a-hed e vuhe
Caer en donæzonas ,
Demeus ann oll vertuziou ,
E galon a ornas
D'ober pep sort miraclou
E buissanç a roas.

En Bro-Zaux e voa ganet ,
En enezen ar zent ;
En scol mad e voa abred
Lequet gant e guerent ;
Dre e squiant quen brudet
Hiltut an doctor bras
Evit mest dezan choaset
Gant sourci en scolas.

Ha prim ha lem a speret
Ardant vit ar studi
Ha dreist pep tra ha bepret
Sourcius da bedi ,
Yaouanc hoas , vel dre viracl
Zant Weltas a zeuas
Didan ur mest quen capabl
Da veza doctor bras.

Na voa nemert ur buguel
Hac e gameradet
An hini vur ha zantel
En devoa en hanvet ;
Hac en e zonz couscoude
Env a voa ar goassan ,
Env en em gonsidere
Vel ar pec'her brassan.

Don e voa en e spered
E voa ur pec'her bras ,
Hac ur binigen gallet
Abred a gommanças ;
Deus an oad a bemzec vla
Bete fin e vuhe
Ha corf ha spered e voa
Merzeriet nos-de.

Na zebre en pep mare
Nemert teir guech ar zun
Hac an deyou m'e tebre
Voa quen lies a yun ;
Var ar c'hallet cousquet ber
Ur min didan e ben ,
Bout guisquet paour ha dister
A voa ferm e reglen.

Gant ar zonzj na vise bet
Buquen mad da netra ,
Gant aon d'en em goll er bed
Ar bed prim a guitta ;
Ebars en enezennou
Desert , abandonnet ,
E-hunan gant zant Cadou
Pel en devoa bevet.

Mæs dre guen rust pinigen
Doue en prepare
Da veza un de an den
Evidomp a felle ;
Jesus oussan a gomzas ,
Divar e eurs zantel
Deus a Vro-Zaux zant Weltas
A zeu en Breiz-Izel.

Disquennet eo en hon bro ,
Mæs prim er solitud
Er plaç ar muyan disro
En em guz ous an dud ;
Hac ennan en oræson
Gant calon e Doue
Ec'h unissa e galon ,
Ne glasqua nemert ze.

Mæs ur sclærigen quen gaer
Na voa quet destinet
Da veza quin pel amzer
Ous hon vro baour cuzet.
Canet , canet , Bretonet ,
Mil bennoas da Jesus
Da veza da Vreiz roet
Ur zant quen burzudus.

Un neubet pesqueterien
A vel a vev en dro
Heb Doue ha heb lezen
Zur da goll an envou ;
Gueltas a vouel e galon
Gant an drue oute ;
Dre forç poan hac oræson
Ho goune da Zoue.

Ar re ma convertisset
A gaç partout ar brud
Deus a zen Doue cuzet
Pel amzer ous an dud ,
Ha chetu anaveet
Gueltas ebars er vro ,
Hac ur voul vras d'en c'havet
A zired tro - var - dro.

Arriv a voa an amzer
Voa gant Doue choaset
M'e vise e zervijer
Partout glorifiet,
M'e vise deut ar vrois
Da chelau e gomzou,
M'e vise bet deut Breizis
Da chanj ho c'halonou.
Dre binigen zant Weltas
Doue voa appæset
Hac e visericord vras
D'hon bro voa gouneet;
Peguen douç ha consolant
A voa guelet neuse
O tont da gavet ar zant
Ar bobl a bep coste.
An dizeurzou hac ar vic
Gant zicour graç Doue
Tre ha tre a zisparis
A bep corn ar c'hontre;
Didan e zirection
Da veva eveltan
Pel ous ar gorrupcion
Breizis a c'houl outan.
E galon vad a guemer
Compassion oute,
Hac evit rei diguemer
D'an oll re en pede,
En ber amzer ez eo ret
Meur a gonvent zével,
Ha quen pront e vent carguet
A Vretonet fidel.

Mil ha mil a vugale
Chetu da zant Weltas ,
Env pehini na c'houlle
Er bed nep ambarras ,
Mæs bugale int en c'har ,
A zent outan parfet ;
Hac an env hac an douar
A zo rejouisset.

Mæs en creis an ambarras
Gant e oll gonventchou
En devoa ur garg all hoas
Da ramplissa er vro ,
D'unani ar pennou bras
Seigneuret Breiz-Izel
Pere a vise , ziousas !
Alies en brezel.

Ziousas zur ! cheffou ar vro
Cri , cruel ha barbar
D'en em gann bete ar maro
A lequee ho gloar
En em drailla ha laza ,
Guelet redec ar goad
Voa ar blijadur vrasan
Evit ho daoulagad.

Deus a cheffou Breiz-Izel
Da zoucat an humor ,
Ha deus a zan ar brezel
Da laza ar furor.
Piou buquen a lavaro
Puissantat zantelez
Burzudussat miraclou
A ziscoas en ho zouez ?

Den , na loen , na dour , na tan ,
Nac arraj , na maro ,
Na resisto zur outan
Ur gomz pa lavare ;
Entre e zaouarn ez eo ,
En env , var an douar ,
Var an oll elemantchou
Laquet pep sort pouvoar.

D'accordi ar re a zo
Adversourien touet
Gant ur vianç vras ez eo
En pep lec'h quemeret ;
Gant carante , da guentan ,
E comze caer oute ,
Mæs nep na re quet outan
A dra zur a zante.

Comt Conomor quen brudet
Dre e grimou grevus
A c'hoanteas da bried
Trifin , plac'h vertuzus ,
Trifin , merc'h da gont guened ,
Trifin , guened ar vro ,
Trifin ive quen brudet
Mæs dre he vertuziou.

Conomor he goulennas
Digant ar c'homt he zad ,
Hac he zad a respontas
Dre ur refus timat ;
Mæs Conomor na zeu quet
D'en em decouraji ,
Esperanç en eus bepred
Da Drifin euredji.

An hypocrit ! da c'hounet
Evitan zant Weltas ,
D'ober gantan ur retret
Da Rhuis a zeuas ,
Rei a reas da gredi
E voa convertisset ;
Hac ar zant d'intercedi
Evitan en Guened.

Petra , eme Comt Guened ,
Ha ma merc'h a rofen
D'un den a grimou duet ,
Heb fe ha heb lezen ?
Seiz pried en deus treuzet
Gant e c'hleze cruel ,
Ghir ur vroac'h en deus credet ,
Na c'houlquet a vuguel.

Gant aon da woassat humor
Un den zo bet direiz ,
Deus ar brezel ar furor
Da béllat ous a Vreiz ,
D'ar C'homt , mar zentet ouzin
Ho merc'h a vo pried ,
Me responto , gant Trifin
Mar arriv drouc ebet.

Var ho qhir , o den Doue ,
Var ho qhir he roin ,
Dac'h hed a hed d'am buche
Netra na refusin ;
Da Gonomor annoncet
Ec'h all donet breman ,
Zur eo penaus e requet
Vo accordet dezan.

En creis ar joa ar gaeran
E ve græt an eured ,
Mæs zant Weltas a ennau
Da bedi zo tec'het ;
Monet e ra ar brinces
Da bales Conomor ,
Mæs p'en em gav douguerez
Eo chanchet e humor.

Trifin prim en c'homprenas ,
Ha var he hanquane
A greis nos a bartias ,
A ridas bete an de ;
Arriv voa tost da Wened ,
Tost da bales he zad.
Conomor p'he deus clevet
D'ar galoump o tostat.

D'en em guz en mesq ar c'hoat
Divar varc'h he zisquen
Mæs env he voursu timat ,
A zroc'h dezy he ven ;
Quit d'ar galoump eo redet ;
Lazet eo an itron ;
Deus a gri vorc he merc'het
Ty he zad a ziston.

He zad pa vel an torfet ,
E verc'h beuet er goad ,
D'an douar a zo zemplet ,
Cri eo e galonad ;
Mæs quelou en deus cacet
Gant hast da zant Weltas
Ha zant Weltas glaharet
Gant hast a ziredas.

Den Doue var e zaoulin
Ferm e ra e beden
Ha var goug zantes Trifin
Ec'h applicà he ven ;
Gant puissanç e comz ouli ,
Trifin a hadveva ;
Pa veler an neventi ,
D'an oll ô bebes joa !
Trifin ur map a c'hanas ,
Tremor a voa hanvet ;
A vian gant zant Welt as
Pel amzer voa zavet ;
Mæs en Carhaix Conomor
E vap en deus cavet ,
Hac e ben d'e vap Tremor
En devez bet troc'het.
En e zaouarn ar buguel
E ben a guemeras ,
Ha betec e vam zantel ,
Hed seiz leo en zougas ;
E galon zo en Carhaix ,
E gorf en Zeint-Trifin ,
Ennan , env hac e vam ghez
A gav ar pelerin.
Goude e dorfet neve
Conomor zo er spont ,
D'ar zant e refus antre ,
D'e c'halv ghir na respont ;
Ar zant gant un tam douar
E vaner a gonfont ,
An abim d'an den barbar
A zigor hac en lonq

Pa vel an diaoul didronet ,
Chasseet ar viçou ,
Pa vel bobl ha seigneuret
Ferm en hent an envou ,
Pa vel peuc'h hac union
En bro ar Vretonet ,
Achiv eo ma mission ,
Emezan , bars er bed.

A neve pel ous an dud
Ur placic a choasas
Da veva er solitud
Var vord rivier vlaoas ;
Ha bete fin e vuhe
Na guittas a ennan
Nemert p'en goul gloar Doue
Pe ezom an nissan.

De e varo gant un æl
Zo dezan annoncet ,
Gant aon na vezo brezel
Vit e gorf da gavet ,
En exposi pa varvo
En eur vag a gommand
Da vont da lec'h m'en c'haço
Deus ar mor an tourmant.

Avel gros gualern , tavet ,
Tavet-hu nos ha de ,
C'houezet-hu doucic c'houezet ,
Avelic ar c'hreiste ;
Didostaït , digacet
D'hon zouar hon zensor ,
Diwallet , oh ! diwallet
D'en punci bars er mor.

Punci e ra couscoude ,
Collet eo hed tri miz ;
Gant pedi , gant yun tri de ,
C'houi , menec'h a Rhuis ,
En c'havo , en interro
Gant joa en hoc'h ilis ,
C'houi gant respet a viro
Ho zensor da Vreizis.
Mar boa puissant zant Wellas
En e zeyou mortel ,
Quen puissant zur ez eo hoas
Bars er gloar eternal ;
En pep amzer , en pep bro
Piou en ved a galon
Heb zantout an effedjou
Deus e brotection ?
Malheurussat eo an den
Zo collet e spered !
Goassoc'h eo hoas ar walen
Deus un den arraget !
Enep d'an diou walen-ze
Aman hac elec'h all
En devez digant Doue
Ur pouvoar special.
Pet cuech n'oc'h eus quiet clevet
Ha guelet martreze
Ur c'hi , ur bley arrajet
Arrivet er c'hontre ?
Ur ravaj e ra zo bras !
Gant a re zo croguet !
Recours ve da zant Wellas
Ha n'ho deus drouc ebet.

Da zant Weltas ve gouestlet ,
Ar c'hi clanv a zistro
Heb bea græt drouc ebet
Da receo ar maro ;
Pedet a ve zant Weltas ,
Ar c'hi clanv a bella
Er momant m'ez eo , siouas !
Varnoc'h prest da lampa.
Pet chapel ha pet ilis
Partout en oll vroyou
Hac ispicial en Breiz
Zavet en e hano !
Testiou int hac a barlant
Ha bepret a laro
An oll zicouriou puissant
A scuilla var hon bro.
Guelet hoas , en oll blaçou
Zo dezan consacret ,
En dro d'e oll auteriou
Bepret pelerinet !
Gante ar veuyou guelet
Pere zo testeni
Ezint bet zur recouret
En creis ho melconi !
Essoc'h eo cont ar stæret
Er splanan firmamant
Vit cont ar re delivret
A c'honar gant ar zant :
Pet mil exempl quen brudet
En Vranç , er mæz a Vranç ,
Pere ro sclær da velet
An ners deus e buissanç ?

Mar bec'h quen pront recouret
Pa bedel zant Weltas
D'ho preservi , Bretonet ,
A walennou quen bras ,
Ho pet sonj ha n'ancouet quet
E teuo hoas prontoc'h
Mar en pedet , d'ho miret
A walennou goassoc'h.
Dreist ar c'horf eo an ene
N'en zonzjer quet , siouas !
Vit re ar c'horf eo ive
He c'hlenvedjou cals gwas ;
Chass clanv , bleidi arrajet ,
Chass , bleidi an ene ,
A zo ho c'hrog gonaret
Dangerussoc'h dre ze.
An ivern zo ur gonar ,
Ur gonar eternal ,
Ar pec'het var an douar
Zo ur venim mortel ;
Arraj eo an avaric ,
Ar luxur , an anv ,
Arraj eo ar gourmandis ,
Ar goler , an dieguy .
Da zant Weltas diredet
D'offri ho pedennou ,
Hac e vezit delivret
A guen cri clenvedjou ,
Hac ho pezo a neve
Yec'hed ar galonou ,
Hac ho pezo graç Doue
Had ar gloar en envou .

E galon vad zo assur
Bepret da Vreiz-Izel
Bepret eo e blijadur
Hon renti oll zantel
Ouzomp zur e quemero
True, compassion,
Ha gant joa e sicouro
Bugale e galon.

Eurus oc'h, N.....is (1)

O caerat un enor

Da gavet en hoc'h ilis (2)

Un hevelep tenso ,

Relegou quen precius

Pere zo un arrhes

E pedo dirac Jesus

Evidoc'h da james !

O zant Weltas biniguet ,

C'houi zo puissant en env ,

Deut eta , deut da viret

Hon c'horf hac hon ene ,

Ny ho ped gant confianç ,

Stouet omp d'an daoulin ,

Miret deomp dre ho puissant

Tensor ar c'hraç divin. — Amen.

J^h LE GUENNEC ,

Person en Carnoet

(1) *Mar deo en eur chapel* : N.... is quez.

(2) — — — en ho touez.